

AN DISGLAVIERIG

Paroles et musique : Georges BRASSENS - Adaptation : Loeiz GUILLAMOT

Glav puilh a rae war an hent bras
Hag hi o vont hep disglavier
Be'm'oe unan, laeret kredabl bras
Ar mintin-se d'ur mignon kaer.
Ha me war red davet ar plac'hig
O kinnig dezhi be' en disglav
'N'ur sec'han'n dour a gleb e dremmig
War un ton dous n'eus laret ya !
Korn ur baradozig
Vit un disglavierig
Be'oa ganti doare un aël
Vit un disglavierig
Korn ur baradozig
M'oe ket kollet va amzerig.
O vont en hent na pegent plijus
Klevout non daou kanenn ar glav
Sonet gant ul laz-senin nenvus
War doen va disgavierig brav.
Fell a rae din kement hag ober,
Gwelet ar glav puilh deiz ha noz
Vit bezan eviti ur salver
Daou ugent deiz, daou ugent noz.
DISKAN
Med se zo sot, pa vez glav zoken
An hentoù 'ya trezek broioù
Hec'h hini a savas ken soudenn
Bewennoù lakaet d'am sellou.
Ret a oa dezhi kuitaat ac'hanon,
Ha gant he hent mont disoursi
Trugarekaet 'n deus ac'hanon
'N'ur vont trezek Bro Berlobi,
DISKAN



Enregistrée et mixée au "Studio Amadeus" à Brest (29)
par Patrick Audouin qui joue aussi au piano.

(Avec l'aimable autorisation des Éditions Warner Chappel)